

Berthou Diou ganaouenn

Modernnaet eo bet an doare-skriva. Levezonet eo an oberour aliez
gand ereadurez ar galleg.
Viou-koukoug ha faziou kemmaduriou a zo er skrid orin.

Taolenn :

Ti-kaniri Breiz
Kan Gourenerien Breiz
Kan Gourenerien Vreiz

Ti-kaniri Breiz

Ni 'zo deut da gana hirie
 'Vel en amzer goz,
Pa oa 'uz d'ar vro dorn Doue
 O rei e vennoz,
En amzer ma oa Breiz-Izel
Eur vro gaer hag eur vro zantel...
 Deuit a-leiz,
'Barz en Ti-Kaniri Breiz !

Ni on-deus savet an ti-mañ
 E-kreiz an dachenn,
N'eus moger 'bed en-dro dezañ,
 Hag evid toenn
Nan eus nemed bolz an neñvou
Pe ar gwez, pe ar hoabrennou.
 Deuit a-leiz,
'Barz an Ti-Kaniri Breiz !

Ni 'fell deom e vo adsavet
 An oll bardoniou,
Ha 'vel gwechall e vo kanet
 Gwerziou ha soniou,
Argaset ar skweriou hudur,
Kemeret ar wir blijadur.
 Deuit a-leiz,
'Barz an Ti-Kaniri Breiz !

Tostait 'ta braz ha bihan,
 Pinvidig ha paour,
Ne ganom ket evid arhant,
 Kennebeud 'vid aour...
Ni a ro on foan, on amzer,
'Vid Breiz-Izel hag he baster...
 Deuit a-leiz,
'Barz an Ti-Kaniri Breiz !

Amañ 'ta e klevfet meuli
Pez a dle sevel
An eneoù mad en dudi
'Vel war ziu askell :
Ar fallagrie diskuillet
A vo taolet d'an droug-spered
Deuit a-leiz,
'Barz an Ti-Kaniri Breiz !

Ar furnez hag ar wirionez,
Argaset dre-oll,
Siwaz, en on amzer nevez,
Gand an dud diroll,
Ganeom e vo skoaziet bepred
A-eneb da vistri ar Bed.
Deuit a-leiz,
'Barz an Ti-Kaniri Breiz !

Evid divenn on hoz herez¹,
Dreist-oll feiz ha yez,
Ni 'ya en Breiz dre bep parrez,
Heb doujañs 'oa mez,
'Vel ar beorien ni 'oar bale
Ha kousked war blouz 'vid gwele,
Deuit a-leiz,
'Barz an Ti-Kaniri Breiz !

Mez 'po bet eun tamm plijadur,
P'arrufet er gêr,
D'ho re goz ha d'ho krouadur,
Kanit 'ta emberr
Eur werz dudiuz pe eur zon,
Evid ma saillon o halon
En o hreiz,
Dre garantez evid Breiz !

¹ on hoz herez : on herez koz.

Kan Gouenerien Vreiz

War eun ton kembraeg.

Ni 'zo paotred taer a Vreiz-Izel
A gar o mamm-vro dreist pep tra,
N'eus na mor, n'eus na tan na brezel
Hag a ve kap d'ober deom krena !

Diskan

Paotred Vreiz, gouenerien dispar,
Paotred Vreiz, gouenerien dispar,
Paotred Vreiz, n'eus ket 'vid o diskar !

Ar Vreiziz, a-viskoaz, da-viken,
A zo digabestr ha divlamm ;
N'eus bremañ na pagan na kristen
Hag a ve kap da rei deom al lamm !

Gourenom ha kanom gand kalon,
Evel on tadou-koz gwechall,
Pa oa treh ar Vreiziz d'ar Zaozon,
Ha pa oa Breiz trehourez Vro-Hall !